

Paol Gwezheneg, ur marc'hadour tapisoù pinvidik, zo o paouez bezañ laeret digantañ an holl vilhidi en doa kuzhet dindan e wele. An enseller Frifurch a gav dezhañ ez eo tremenet al laer dre toull bihan lukan un doenn izel e rez-an-douar an ti. Gant ur biñsetenn e tastum ur bouchad blev kollet kredapl gant al laer pa'z eo tremenet dre an toull-prenestr strizh. Diskred zo war pevar den.

An hini kentañ eo **Youn Baraer**. Ur gwaz bihan ha moal eo, lunedoù gwer tev 'vez gantañ. Abaoe pemp bloaz e ra war-dro aferioù Paol Gwezheneg.

An eil eo **Mark Korfeg**. Mevel an ti eo. Tost daou vetrad eo e vent, ha tost kant ugent kilo eo e bouez. Kas kuit an dud torr-penn eo e labour.

Yann Denmat, an trede den diskred warnañ, zo amezeg d'ar marc'hadour tapisoù. Bihan ha treut eo ha barrek war ar sportoù. Bevañ a ra e-unan ha ne'n em glev ket mat gant Paol.

Ar pevare den, **Rémi** e anv, eo mab pennhêr Paol Gwezheneg. Studier medisinerzh eo ha ne deu da di e dad nemet e-pad ar vakañsoù-skol.



Evit diskoulmañ an enklask e vez didamallet unan-hag-unan ar re na c'hellont ket bezañ kablus. Neve ne chomo ken er fin nemet an den kablus. Evit sikour ac'hanoc'h setu un nebeud displegadennoù gant an enseller Frifurch.

1. En ur sellet pizh en-dro d'an ti em eus merzet e oa deuet al laer e-barzh dre un toull-prenestr e rez-an-douar an ti.

Ne c'hell ket bezañ

2. Dastumet 'm eus ur bouchad blev laosket gant al laer war sterniaj ar prenestr.

Ne c'hell ket bezañ

3. Un den eus an ti ne vefe ket tremenet dre doull prenestr-mañ.

Ne c'hell ket bezañ

4. Tri den, diskred warne, zo bet didamallet...
Al laer ne c'hell bezañ nemet :

.....